

## AN DURZUNELL

160

GRACIEUX

♩ = 56 à 60

Kalz am-zer am eus Kollet O furehal ar c'hoar-jou  
 Jivit soupren ar dux-zunel Kousket war ar bran-kow Skoaziet am eus  
 ma fuzul Met ken-net em eus fall, Te-chet eo an dur-zu-nel,  
 Ha ni-jet er c'hoar all.

## II

Diouz an noz ha d'ar mintin  
 'Klevan al laboused  
 O kana ,o fredoni ,  
 Da veg ar gwez pignet  
 Ha n'eus nikun anezo  
 A bikfe va c'halon  
 Evel mouez an durzunell  
 O ouela d'he mignon.

## III

Hirvoudi ra noz ha dez  
 Gant ar boan, an anken  
 'vel eur paour kaez intanvez  
 Kollet ganti he den.  
 Hekleo he mouez klemmus  
 A red dre ar c'hoajou ,  
 A zc meurbet poanius  
 D'an holl labousedou.

## IV

" Petra,turzunel yaouank  
 A dourmant da galon?  
 - Kollet em eus,emezi ,  
 Va fidela mignon .  
 Ma na deu ar chaseour  
 D'ober d'in-me meravel  
 Me varvo gant ar glac'har  
 d'Am'mignon koant fidel.

N'eus na louzou, na souten ,  
 Na frealzidigez  
 Gouest da barea souden  
 Gouli va c'harantez ,  
 Trec'het oun gant ar glac'har;  
 Mont a ran da vervel ,  
 Met ne varvin ket kountant  
 Ma ne varvan fidel ".

## VI

Gwelet em eus o vervel  
 An durzunell yaouank  
 Disec'het piz he c'halon  
 Gant ar boan, an tourmant  
 'n he huanad diweza  
 He deus c'hoaz lavaret ;  
 "Kenavo,mignon fidel "  
 Raktal eo tremenet .

## VII

Melezour skaer ha gwirion  
 Eus ar wir garantez ,  
 Ha ne gaver e kalon  
 Ar yaouankiz direiz.  
 - Nann, nann; ne varvin laouen  
 Ma ne varvan fidel.  
 Ha biken ne zizonjin  
 Maro an durzunell.